

5

BARZAZ,


PE

GANAOUENNOU BREIZ

DASTUMET ENN ENOR D'AR VRO

GANT ANN AOTHOU

THÉODORE HERSART DE LA VILLEMARQUÉ.



*Enn e'hañer o kama ganaouennou Breiz.*

E PARIS,

E TI DELLOYE, LEVRIER AR YREIZIZ,

E BREIZ-IZEL,

E TI ANN HOLL LEVRIERHEN EIZ AR VRO.

## KROAZ-DOUE KANAOUENNOU-BREIZ.

War don : *Eunn arc'huel abertz ann Aotrou*

A.

ann den fur, ann den abson  
A gar he vro a wir galon.

B.

Breiz eo hor bro, Bretoned omp ;  
Karout Breiz dreist-holl a dleomp.

K.

Kement ho c'har a dle c'hoantat  
Rai d'ezhi enor ha brudvad.

D.

D'ezhi en deuz roet enor  
Ann aotrou en deuz great eul leor ;

E.

Eul leor, o tastum, tro-war-dro,  
Kaers kanaouennoù ar vro.

F.

Fallet eo bet d'ezhan diskouez  
N'ed-omp ket sod, ken-nebent gouez.

G.

Gouzout a rai brema re ker  
Hag heñ 'deuz spered ar c'houer.

H.

Hi lavare ; e na vleuni mad.  
e Nemed greun dibabet, avad. a

GII.

Ghetu ar greun na vleuni ket ;  
Kalon digar ann den kalad.

C'II.

C'hoarzit c'hoaz ouz omp, Gallouet,  
C'hoarzit c'houero eo a reffet.

I.

It da glask, ebarz ho kerioù,  
Gwersioù ker kaer hag hor gwersioù

J.

Jouou mezuz, ha netra ken,  
Er c'herioù bras, a glask ann den

L.

Labourat a ra d'ar zehou,  
D'al lun a ia d'ann tavaranoù.

M.

Mervel a ra, pa zeu he zez.  
Ken dizont evel eul loen gouez.

N.

Ne ked evelse e vevomp ;  
Bretoned ha Kristenien omp

O.

O Skuilla c'houez war ann douar,  
Hon euz sonj a verez kalvar

P.

Pa skuillomp, avad, lommou c'houez,  
Ho doug da zoue hon euz ;

R.

Roue ar zent hag ann dud paour,  
Ho mir enn eunn orselig aour ;

S.

Sellet a ra bemdez out ho :  
Pa vezo swalc'h, hor galvo

T.

Troi a roomp eta hon ene  
Hag hor lagad, war-zu ann ne

U.

Un deiz az imp d'ar baradoz,  
Da veuli Doue deiz ha'noz.

V.

Va zad vad ! eno e kaniomp !  
Eno gwersioù kaer a glevimp !

W.

War ann treoz ha war al lano,  
Enn eur c'hortoz, ni a gano ;

Z.

Ze a rat dudi d'hor spered,  
Er poanioù kalad euz ar bed.


## ALI D'AL LENNER.

Evel n'euz nag Y, nag X, n'euz ivez na C distak na O, e brezoneg ; al lizeren K a vez lekeat evid ann diou lizeren-ze, ha skriva a rear : *kenetel, ket, kas, kis, koz, kuz, kristen, kraz, etc.*, e-leac'h *quentel, quet, cass, qui, soz, euz, christian, croas, etc.*, a gaver skrivet evelheñn e meur a levr brezoneg heb reiz.

Ar G, e brezoneg, a lekear dirag E ha dirag I, evel dirag A, O, U ; ha skrivet a vez : *giz, e-leac'h quiz, ger, e-leac'h guer, treger, e-leac'h treguer, egad, e-leac'h egued, genou, e-leac'h quenou.*

Ann-diou V, staget evelheñn W, a dall aliez kement hag eur V heb-ken, e Leon, ha ke-

ment hag OU e Treger hag e Kerne-Huel. Al Leouk a lenn *var* ar gerik *our* ; ann Tregeriz hag ar Gerneviz a lenn *ouar*. Darn a lavar ar *verc'hez*, diouz hano santel ar *verc'hez*, darn a lavar ar *ouerc'hez*. Ann Wa dal c'hoaz aliez U e Kerne ; ar Gerneviz a lavar : *gwech, quenn* ha *guer*, diouz ar c'homzou skrivet *gwech, quenn* ha *guer* ; ar re-all a lavar *gouech, gouern* ha *gouir* ; peb bro a lenn hervez ho giz. Ar pezh a zo red eo heulia eur reiz ato hevelep hag hervez ar skiant-vad, evel m'en deuz gourc'hemennet d'ar veleien enn cullizer kaer mearbod ant Aotrou 'n eskop a Gennep.



BARZAZ

PE

**GANAOUENNOU BREIZ**

DASTUMET ENN ENOR D'AR VEO,

GAND

**THÉODORE HERSART DE LA VILLEMARQUÉ**

HA NOULET GAND TAOLENNOU

**ERNEST BOYER.**

## D'AR VRETONED.

Red eo rei da c'houzout d'ann holl guitibunan  
Ar pez a vad a zonz diwarbenn al leor-man  
Eur Roue, daou Eskob, hag ar Pab he-unan.

Roue braz Prusia en devez lavaret  
D'ann denjentil iaouang en deuz ho dastumet .  
« Gwersiou Breiz a laka va spered souezet ! »

Ann eskop a Gemper, hag hini Sant-Briek :  
« N'euz netra, eme-z-ho, skrivet e brezonek  
« Enn eunn doare ker kaer ha ker meuleudiek. »

Lavaret en devez ar Pab, hon Tad santel :  
« Biskoaz n'am euz lennet kanaouennou evel  
« Ar re pere a gan ann dud e Breiz-izel. »

Petra lavaret ken? Hag hen n'euz ket skrivet  
Roue santel David, enn amzer dremenet?  
« Neb a gan a ra mad, hag a vezo salvet. »

Kanomp eta, Breiziz, war vor ha war zouar  
Kanaouennou hor bro pere n'euz ked ho far ;  
Hag enor braz da Vreiz ha da gement he c'har !



## KENTEL

DIWARBENN KANAOUENNOU BREIZ.

Ann denjentil iaouank pehini en deuz dastumet kanaouennoù Breiz, oa eunn nozvez, e korn ann oaled, eunn ozac'h koz o kana diraz-han, amezeien o selaou, evel ma welit enn daolen diaraog. Goude ma en devoa ann ozac'h kanet, hag ann denjentil skrive, ann den koz a gomzaz evelhenn : — Klevet am euz, va mah, emä-z-han, p'nao'z ho'e'h euz great, e'vid re ker, eunn difab ka-

naouennou euz ar vro, ha penaoz int bet kavet ker kaer gand ann dud desket mad, e pevar c'horn ar bed, na glever a bep tu nemed meuli ar Vretoned. Ha perag na rit-hu ked eunn dibab-all, evid ar Vretoned ho-unan, c'houi pehini a gar anezho evel ma oc'h karet gant-ho? Mar kirit me rei d'e-hoc'h eunn ali : eunn dra deread a ve, lakaat moula hor c'hanaouennou, hini hag hini ; hag e vent kavet da brena digand ar ganerien pe digand al levrierien, evel ar c'hanaouennou-all. Ann dud ho c'haffe, er pardonioù pe er foarioù, da gas gant-ho d'ar ger : plijadur vraz e rafe d'ann neb a oar leun ho c'havout skrivet, abalamour n'int ked anavezet penn-da-benn gand ann holl, ha n' int ket kanet ervad e peb leac'h. Hag o veza bet prenet, na vent ket taolet a gostez evel koz-rimolennou zo ; neb aoun ! Miret e vent ; ha pa ve eunn nebeudik mad anezho, e c'hallfent beza kaset da eul levrier bennag, da staga ann eil diouc'h e-ben, ha da lakaat eur golo war-n-ezho ; ha great eul leor kaer hag a rafe dudi d'ar Vretoned, setu !

— Ober a rafe, avad ! — eme ann amezicien eun eur vouez.

— Tad koz, a respontaz ann aotrou, pellik zo abaoue e leverer penaoz ann dud deuet eun oad, a zo furoc'h evid ann dud iaouank ; kredi a rann. Biskoaz na vije deuet em spered ar pez a aliit ac'hanoun da ober ; heulia a rinn hoc'h ali, heb mar, ha bennoz Doue d'e-hoc'h ! Me a lakai moula diwar va c'houst evid ar bobl kanaouennou ar vro ; ha ne ket war baper stoup e vezint moulet na ken-nebeud gand lizerennou koz, na ken-nebeud gand koz-liou ; pell a-ze ; moulet e vezint war baper gwenn-kann, ha

gand lizerennou nevez-llamm, ha gand liou mad : ha moulet e Paris, gand ann hini a zo mestr war ann holl voulerien.

Petra zonz d'e-hoc'h, tad koz ? Ha mad a vezo kement-se ? Koulskoude ouspenn e rinn. Me rai evid al labourerien ar pez n'ameuz ket great evid tud ker : brema eo deut ar c'hiz lakaat taolennou war leoriou ann dudchentil ; mad ! me a lakai, ober taolennou kaeroc'h e'hoaz war ar c'hanaouennou a likinn moula evid ann dud diwar ar meaz ; hag evel n'int ket pinvidik, siouaz, d'ezho ! hi a gavo ar c'hanaouennou-ze da brena, loden ha loden, pa girint, marc'had mad, priz al liou, ar paper, hag ann taolennou ; netra ken : ha c'hoaz e vijent roet evit netra d'ezho paneved d'ar mizou braz, paneved d'ar pez a zo red pea d'ar voulerien, d'ann taolenerien ha d'al levrierien, kerkouls ha d'ar ganerien baour.

Evelse e komzaz ann aotrou.

— Mar teuit a-benn euz a gement-ze, eme ann den koz, e c'hallfet lavaret ho pezo great, ar pez n'euz great den-e-bed. —

Ha great en deuz avad ann denjentil iaouang evel m'en doa lavaret.

Lekeat en deuz moula kanaouennou ar vro ; ha loden ha loden ho c'haver da brena, marc'had mad, digand al levrierien ha digand ar ganerien ; ha setu hi.

Prenet eta ann neb a garo ; kanit-ho ; ha, goude ho c'hana, sellit mad ouz ann taolennou kaer a zo lekeat war-n-ezho.

Great int bet enn darn vuia gand eunn taolennet dispar, gagnet ha maget e Breiz, hag en deuz baleet dre bevar e'horn ar vro, o tenna war baper kizou ar Vretoned, kaera giz a zo er bed. Hlen eo a welit amañ warlerc'h, oc'h ober ann taolennou, evel ma hoc'h euz gwelet diaraog, o skriva he ganaouennou, ann aotrou en deuz lekeat ober taolennou evid al leor-man.







Sant Izidor, patrom al labourerien, oc li arat.

## AL LABOURERIEN.

Ar c'henta roucou a zo bet a oa labourerien douar. Meur a zen a vrezel, hag euz ar re ar muia brudet, enn amzer goz, a vije kavet er park o labourat ; neuze, enn hor bro-ni, ann duchentil vraz n'ho doa ket mez torri douar ; hirio ann deiz c'hoaz zoken, impalaer braz Bro Sina, a gas ann arar, he unan. Petra ken e livirinn d'e-hoc'h ? Ha ne oa ket sant Izidor benniget labourer douar, enn he vuhez, hag hen

brema patrom ann dud diwar ar meaz? Red eo eta d'ann holl guitibunan karout hag-enori eur stad a zo bet enn hi roueou, ha brezelerien brudet, ha tuchentil vraz; eur stad a zo c'hoaz enn hi eunn impalaer; eur stad hag a zo bet enoret gand eur zant euz ar re vrasa. Ann neb na gar ked. ha na enor ked al labourerien, a zo eta eur c'hoz-fougeer. netra ken; ha diskouez a ra penaoz n'en deuz na deska-durez na skiant nag anaoudegez-vad zoken, abalamour ma zebr bemdez bara, heb sonjal eo bet hadet ar greun dre c'houezen tal al labourerien baour. Evid ann hini en deuz dastumet kanaouennou Breiz, karout a ra euz a greiz he galon ann dud diwar ar meaz; ho meuli a ra, ha c'hoant en deuz da ober ho mad. Dreze e laka kentel kaer al labourerien e penn ann holl ganaouennou euz ar vro. Selauit, me ho ped, va zudigou keaz :

*War don : Santez Mari mamm Doue.*

Tostait holl, Bretoned, da glevet eur gentel :  
 War buhez al labourer eo bet great n'euz ket pell ;  
 Eur vuhez kriz ha poaniuz ; paouez na deiz na noz !  
 Hag a ren a galoun-vad da vont d'ar Baradoz.

Al labourer a labour, n'euz forz e pe amzer.  
 Kouls dindan ar ienien ha dindan ann domder ;  
 Pa vez ere'h, grizil, kurun, avel, glao, skourn, kazerc'h.  
 Enn he bark, o labourat, daoubleget, hen gwelfec'h.

Al labourer zo gwisket, peurvuia gant lien ;  
 Ne vez ket treset bemdeiz, evel ar voure'hizien ;  
 He zillad zo truillennet, gand ann douar saetret,  
 Re ker, a renk he gavout, a skop ouz he welet.

Dishenvel meurbed eo stad ar paourkeaz labourer,  
 Dishenvel diouc'h stad ann dud pere a chom e ker ;  
 Re-ma ho deuz kik, pesked, ha bara gwenn bepret,  
 Al labourer tammou iod, bara seac'h, dour bervet.

Al labourer renk pea, pea e peb amzer,  
 Pea tellou d'ar roue, beb bloaz, teir pe bedeir ;  
 Pa ranko pea he vestr, ma n'eo prest ann arc'hant,  
 Foar a reer gand he zanvez ; aman ann nec'hamant !

Da bea c'hoaz en devez obidou d'ar person,  
 Evel ma'zeo ar c'hustum, kement-se zo gwirion ;  
 Rei ho c'hest d'ar veleien, aluzen d'ar beorien,  
 Hag, evit na faziint ket, gwir d'he zervicherien.

Al labourer c'hoaz ouspenn a vezo tamallet ;  
 Gand ann dud euz al lezen e vezo piz skarzet ;  
 Euz he nebeud a vadou e vezo dibourc'het,  
 Hag he zanvez o vont kuit n'euz ger da lavaret.


Ha mar c'hoarv d'ezhan konta he arc'hant, a-wechou,  
 Arc'hant en deuz dastumet gant kemend a boaniou ;  
 C'hoarzin a ra ar geriz, oc'h hual anezhan ;  
 Ha mar 'geller, he gigner, oc'h ober goab out-han.

Enn divez, al labourer, baleet leac'h ma karo,  
 E vezo drouk-prezeget, kalz tud hen disprijo :  
 Ha koulskoude mar teufe da zonzal ann dud-ma :  
 Diwar breac'h al labourer m'ar bed-holl o veva.

Setu hor buhez, sionaz ! hor buhez kriz meurbet,  
 Hor stad a zo truezuz, hor stereden ka'ed ;  
 Hor stad zo poaniuz meurbet ; paouez na deiz na noz !  
 Renomp-hi a galoun-vad da vont d'ar Baradoz.



Sant Izidor, o tistroi diouc'h ar park gand he loenet, o welet ar baradoz digor,  
 en em dant war he zaoulin.



Eur vretonez e-c'haez treid Jezus ha kurrnet gant-han, e gloar ar baradoz.

## AR BARADOZ.

Aliez e klever tud o lavaret :  
 « Na peger kriz eo ar vuhez-  
 man! » Ha ne ked eur gaou.  
 Abaoue ma oe kaset kuit diouc'h  
 ar baradoz-douar hon tad kenta  
 abalamour d'he bec'hed, abaoue

ann deiz-se, eo bet red d'he vugale gouzav poan evit gounid Baradoz-Doue. Dre-ze ann neb en deuz trubuillou ha beac'h war-n-ezhan, a vezo salvet ma ho c'hemer a galon-vad. Hanter zalvet eo eta ann dud diwar ar meaz pere ho deuz eur vuhez ker reuzeudik. Hor salver Jezus-Krist en deuz hel lavaret : « Ra vezo benniget, eme-z-han, ar re a zo tenn war-n-ezho, abalamour, beza e ma int war hent ar silvidigez. O sonjal er c'homzou dudiuz-ze en em laouenait, Bretoned, ha kanit aliez gwerz ar baradoz, rag eunn deiz, e kemerot perz e joaiou ann euv.

*War eunn ton anavezet.*

Jezus ! peger braz vo  
 Plijadur ann eneo,  
 Pa vint dirak Doue,  
 Hag enn he garante.

Berr gavann ann amzer,  
 Hag ar poaniou dister,  
 O sonjal de ha noz,  
 E gloar ar baradoz.

Pa zellann enn envo,  
 Hag entreze va bro,  
 Nijal di a garenn,  
 Evel eur goulmik wenn.

Pa vo pred ar maro,  
 Neuze me gimiado  
 Ouz ar c'hig ankeniuz,  
 Enebour da jezus.

Gand joa e c'hortoann  
 Ann tremen divezan :  
 Hast am euz da welet  
 Jezus, va gwir bried.

Kerkent a ma vezo  
 Torret va chadenno,  
 M'en em zavo enn er  
 Evel eunn alc'houeder.

Tremen a rinn al loar  
 Evit monet d'ar c'hloar ;  
 Dreist ann heol, ar stered,  
 Me a vezo douget.

Pa vinn pell diouz ann douar,  
 Traonien leun a c'hlac'har,  
 Neuze me rai eur zell  
 Ouz va bro Breiz-izel :

Neuze me lavaro :  
 — Kenavo d'id, va bro,  
 Kenavo, bed doaniuz,  
 Gand da veac'hiou poaniuz :

Kenavo, paourentez ;  
 Kenavo, goanerez,  
 Kenavo, trubuillo,  
 Kenavo, pec'hejo !

Pelloc'h ne zoujinn ket  
 Ardou ann drouk-spered ;  
 Biken me n'em gollo  
 Gonde pred ar maro.

Evel eur vag gollet,  
 Va c'horf deuz va c'haset  
 Ama, dre ann avel,  
 Ar glao hag ar riel;

Maro, te' ar porzer  
 A zigor d'in ar ger,  
 Pa vruzun gand ann her  
 Va lestr oud he rec'hier. —

Abep-tu pa zellinn,  
 Kement tra a welinn  
 A rai d'am daoulagad  
 Ha d'am c'halon mil vad.

Perc'her ar baradoz  
 Digor ouz va gortoz,  
 Ar zent, ar sentezed,  
 Tost d'am digemeret.

Me vo digemeret  
 E palez ann Drinded,  
 E-kreiz ann enorio  
 Hag ar meuleudio :

Hag eno, evit mad,  
 Welinn Doue ann tad  
 Gand he vab benniget  
 Hag ar Spered meulet.

Me a welo Jezus,  
 Enn eur c'hiz dudiuz,  
 O lakat war va fenn  
 Ar gaera kurunen :



— Ho korvou evuruz,  
 A lavaro Jezus,  
 Oa tensorio kuzet  
 Enn douar benniget.

Evel grizio roz-gwenn,  
 Pe lili pe spern-gwenn,  
 E kornig eul-liorz,  
 Ed hoc'h e-kreiz va forz :

C'houi zo, er baradoz,  
 Evel bokedou roz  
 A zivleun d'ar mare,  
 Hag a vleun adarre. —

Evit poanio dister,  
 Evit ankenio berr,  
 Ni a vo peet mad  
 Gand Doue, hor gwir dad.

Kaer a vezo gwelet  
 Ar Werc'hez benniget,  
 Gand daouzek stereden  
 A ra he c'hurunen.

Gwelet a raimp cuspenn,  
 Gant ho peb a delen,  
 Aele hag arc'haele  
 Holl o veuli Doue.

Gwelet a raimp-ni c'hoaz  
 Leun a c'hloar, leun a c'hraz,  
 Hon tado, hor mammo,  
 Hor breudeur, tud hor bro.

Ann holl eledigo  
 War ho eskeligo.  
 Ker mignon, ker ru-benni,  
 A nijo dreist hor penn;

A nijo dreist hor penn,  
 Evel eunn hed gwonen  
 Enn eur parkad bleunio,  
 Son ha e'houez-vad gant-ho.

Euruzded heb he far !  
 O sonjal me ho kar,  
 C'hui a ro d'in dizoan  
 E poanio ar bed-man !



Ann itron-Vari hag ar mab Jezus.

## MEULEUDI ITRON VARIA BREIZ,

GREAT A-SEVEZ GAND DASTUMER KANAQUENNOU BREIZ.

War don : Lokrist-ann-izelved.

AR DABZ.

Paotred Treger, kanerien gaer;  
Paotred Kerne, gwisket ker kaer;  
Paotred Leon, flour ho prezek;  
Paotred Alre, tud kalonck;

Paotred Breiz-izel, va zud vad;  
Tomm a galon, ha skanv a droad;  
D'in livirit, d'in livirit,  
Peleac'h oc'h bet, peleac'h ez it?

TREGERIZ.

Mont a reomp da bardonia;  
Da bardon itron Varia;  
Da bardon mamm ar Vretoned,  
Brasa santez a zo er bed.

KERSEVIZ HA LEONIZ, ENN EUR VOUEZ.

Me labourer, me mecherour,  
Me zo soudard, me devezour,  
Me zo mevel, me zo matez;  
Ni ja da welet hor mestrez.

ENN DREGERIADEZ.

Me oa, 'boa seiz vloz, pistiget,  
Gand ann drouk-penn, hep ehan 'bed;  
Eet eo kuit va zrouk-penn, breman;  
Mil bennoz da vamm ann dud klan!

EUR C'HIGADEG IAGUANK.

Me amboa poan ha melkoni;  
(Aliez, siouaz ! hon euz-ni !)  
Gant-hi em oun bet dibouniet;  
Ha mont a rann d'he darempred.

EUR GERNEVOD.

Me am boa klan va holl loened,  
Pa bediz mamm Doue ganet,  
Ganet etre daou aneval;  
Ha denet int da vad raktal.

EUR LEGSAED.

Me oa enn eul leste o veuzi,  
Pa n'em westliz da vont d'he zi;  
Ar Werc'hez e deuz va c'hiovel;  
Me ja breman d'he darempred.

EUR GERNEVODEZ.

M'em boa va mamm war he gwele,  
He dorn em dorn, me a wele;  
Me gan breman, deut eo da vad!  
Gwerc'hez vari, trugarekat!

EUR VARN.

M'em boa va mab enn he gavel,  
Hag hen ien, o vont da vervel;  
D'ar Werc'hez he westliz timad;  
Hag hen iac'h ha laouen, avad!

TUD ALL.

Me a oa mud, hag e komzann;  
Me oa bouzar, hag e klevann,  
Me a oa dall, ha me a wel;  
Mil bennoz d'ar Werc'hez santel!

EUR GWENEDAD.

Me oa enn Aljer, er brezel,  
Pell, siouaz ! euz a Vreiz-izel;  
Ha me d'ann douar diskarret  
Gand eunn tenn kanol am boa bet.

Ha me sellet ouz ann envou,  
O skuilla goad a boulsdou;  
Ha me gervel mamm ar Salver;  
D'e-hoc'h en em westlann, mamm dener. —

Ne oa ked ar gomz lavaret;  
Ar Werc'hez a zo diskennet,  
Ha gand ho daouarn benniget  
Va gouliou o deuz sarret.

Pa'z eunn distroet war va c'hez,  
Gwerc'hez, me rei tro hoc'h iliz,  
Diarc'hen kouls ha diskabel,  
Em roched goadeg a vrezel.

Oh ! ne ket gaou a lavaraz  
Ann tadou santel a skrivaz :  
« Biskoaz den n'en deuz ho pedet,  
Gwerc'hez, heb beza selhouet. »

ANN HOLL ENN EUR VOUEZ.

Selaout c'hoaz ar Vretoned,  
Pa vezo pred beza barnet ;  
Pedit neuze c'hoaz evid-omp ;  
E-c'harz ho treid her goulennomp.

Livirit d'ezhan : « va mab keaz  
Dre va diou-vron ha dre va leaz,  
Dre ar c'hoz en deuz ko touget ;  
Digorit d'ezho, me ho ped.

Tud a Vreiz-izel int, tud paour,  
Tud vad, brevet gaud al labour ;  
Tud a dorre gaud ann alar,  
Dre c'honezen ho zal ann douar.

Awalc'h, awalc'h ho deuz c'honezet ;  
Poaniou awalc'h ho deuz-hi bet ;  
Awalc'h ho deuz skuillet daelon ;  
Beit d'ezho perz enn ho joaiou. »

Neuze 'leni Doue da respont :  
« Dont tre enn envou ec'h hallont ;  
Karout a rann ar Vretoned,  
Pa garont va mamm benniget. »

AN BARZ.

Na kaer eur pardon, tudigou,  
A vezo pardon ann envou !  
Na dispar ann offeren-bred  
A vezo enn envou kanet !

Ann neb en deuz great ar werz-niñ,  
A leverer Barz anezhan,  
Dre ma eo desket, ha ma gar  
Ober kanaouennoù, a gar.